



CHANSON NEVEZ,
VAR SUJET AN EFERIEN.

TOSTAIT d'am selaou, c'houi, mignonet Bachus,
Ha me a zisco dêc'h an etat danjerus
A zo o re henti an hostaliriou
An deveziou pemdez, ar zul hac ar goueliou.

Divarnòn va-unan e teuàn da juji
Peguen riscus e zeo dont da abandoni
Ar c'horf hac ar madou, alies ar vue,
Da zerc'hel hostizien en o frosperite.

An nep a ve goasqet, nemet diavis ve,
A dle gout en pezh hent e chom ar virione;
Pa meus douguet ar bec'h ha poezet anezàn,
E tleàn gout ivez pe boez a zo ennàn.

Bet a meus eur guentel hac a zisq bremâ din,
Pa deuàn d'e c'hompren ha d'e c'honsiderin:
Discoelet e deus din eo mat delc'hel rêson,
Evit nep abondanç caout moderation.

Ah! petra laràn-me? caout moderation
A zo eun dra boannius, pa zezir ar galon;

Mes gouscoude ê goell combatti ar panchant
Eguet ne dê beva evel eun insolant.

Sourcen an oll viçou partout a meus clasqet
Hac ebars er boesson e meus-y rancontret;
Me a deu d'e guervel mam ar fallagriez,
A laca an dizurs en kêr ha var ar mêz.

Te a c'heus goneet calz eus a galonou,
Ha laqet chenchamant en nombr a diadou,
Ha d'an oll viçou all e telc'hes dôr digor,
Dre eno calz a dud o deus collet o enor.

Mes ar peza zo voas ebars en pep canton,
An nep a ve troet gant dizurs ar boesson
A dacho da zistrêi ar re all evelte,
Evit mont assambles da offanci Doue.

Mont a rêr a vanden, hep eston na true,
Da zistruja ar c'horf, da vlessa an ene;
Var digare laqat an tan var ar c'herniou
E teuer da c'houlén güin eus a bodadou.

Eun darn demeus anê, e fin o boutaillad,
A lavaro neuze : poent ê d'emp-ni quittä.
Nan, nan, eme darn all; pa zomp en hostaliri,
Ha p'ê tommet ar forn, e vo ret e c'hôri.

Neuze e vo clêvet eur garnach, eur brezel;
Mar be den rêsonabl, vo forcet da devel :
Ar vertus, ar bon sans a renq coll o droajou,

Eno neus da veuli nemert ar sottizou.

Entre m'ho po arc'hant e vezot servichet,
Ha pa vec'h eus an dol dre ho coublou simplet,
Mar gallit discoel c'hoas arc'hant eur chopinat,
C'houi a vo sicouret da zével var ho troad.

Beza zo hac a gred demeus an eferrien
Eo oblijet an ên da blega d'o lezen;
E tle au douar crena o clêvet o c'homzou,
Ar môr en o lavar ober *tre* ha *lano*.

Mes chenchit a vuez hac a sonjesonou,
Ar blijadur ne m'ân qet ebars hent ar viçou;
Mar c'heullit ar boesson, an deboç, an ebat,
E santfot ordinal eun dra ous ho piçat.

Ho conscianç a vo hac en deiz hac en nos
O clasq e chenchamant hac o c'houlén repos;
Roit dei he mennat ha chenchit hep appel,
Hirroc'h vo ho puez, hoc'h ene a vo voell.

Arrêtit eur moment da zellet ouz ar bed,
Hac e velfot varni calz a dud ruinet;
O re henti ar boesson ha compagnunez fall,
Eus forcet hep fuzuill, un nombr da chasseal.

Pa vezot oc'h eva, e velfot filoutet
Oc'h ober an dro dêc'h, hac int oll o laret:
Ho famill en antier a zo a galite,
Tud a fêçon int tout, c'houi zo denbrao ive.

N'hon eus ezom da c'hout mad ho hano bade,
 Ar rest a onzomp tout deus eclat ho ligne,
 A zo dre oll meulet, caret e pep contre,
 Ha c'houi oc'h eus patant an ær demeus ane.

Mar bec'h en ho coaze e safot en ho sa :
 Allon ta, hostizes, amàn güin ha bara;
 Mes e fin ar regal ar re-màn ya n'o rout,
 Hac ar scoden zo grêt a goe en ho cont tout.

Ha c'houi n'o po evet nemet eur voutaillad,
 O pezo da bêa marteze dec podad;
 Mes ma vijac'h er guêr, c'houi a ve calz furoc'h,
 Neuze ne bêfac'h qet ober goab ac'hanoc'h.

Eur veach ha ma po implijet ho madou,
 Ho prassa mignonet qenta ho tilezo;
 Mar gueont ho pete vo gant eur pas gorrec :
 Da goad ar baourentez ne yêr qet o redec.

Mes ne c'hortozit qet ar bed oll da laret
 E vo eur vuez fall an hini a heuillet;
 Camaradet ho po, hervez ho fantazi :
 Ne zeus qet a viçou n'o deus tud d'o-meuli.

Ne gredit qet e ve ar bed oll drouc-contant
 O velet ac'hanoc'h o tispign hoc'h arc'hant :
 Ra vez unan o coll, eguile a c'hone,
 Rac ral e'r maleuriou n'eus profit aneze.

Oll yaouanqis va bro, ebars en honestis

En em darempredit goude fin an Ofiç,
 Ha lezit ar boesson da guemer e repos,
 Rac eus a vil maleur e zeo én ar pen-cos.

Ha c'houi, tud ancien, demezet hadazemezi,
 N'en em antêtit qet gant an hostaliri;
 Ne deuit qet da vaga ar viç-se en ho calon :
 Ar peoc'h ne chom qet pell etouez re a voesson.

Eur merq a union etre ar vignonet,
 Eo eva eur bannac'h hep beza direglet :
 Grit usach vad gantàn bars en compagnunez,
 Mes tachit da viret ar rêson vit mestres.

Pa zo deut güin er vro eo deut evit eva,
 Mes nê qet a urz vad n'em ruina gantâ;
 Rac goude ar cher vad ec'h arru *Paourenle*,
 Na ve qet e-unan, *Qerse* a deu ive.

Cetu amâ bremâ ar fin eus va c'hentel :
 Heuillit-hi avichou, ha lest tizan Bourdel,
 Moderi a lerer a zo mat vit nep fest.
 Consultet ar rêson, hi laro dêc'h ar rest.

Mes bremâ, va Chanson, p'ê güiroc'h finisset,
 Sinet eo ho pass-port : it elec'h ma qeret;
 Ha mar bec'h attaqet neus fors bars e pez bro,
 Retornit var ho qiz, va merc'h, moc'h anzavo.

E zàn d'oc'h instrui aroc ma partifet :
 Ne zônjit qet e vec'h gant an oll dud meulet,

Rac qen ral ê guelet c'hoant an oll ebars er vro,
Ha m'e güelet an urz vad en hostaliriou.

FIN.



EURUSTET PAUTR AR GUIN.

Var ton : *Ma Commère, quand je danse.*

TRI zraic ordinalamant
 A glasqer da bossedi :
 Eur vreguic coant, güin hac arc'hant,
 M'em be re ganto o zri.
 Bo, bo tud gourmand, *bis.*
 Eo ar seurt-se, eo ar seurt-se;
 Bo, bo tud gourmant, *bis.*
 Güell eo güin eguet arc'hant.

Eur vreg e penn ho tieguez
 A rai deoc'h meur a chagrin ;
 Foei var eur seurt marc'hadourez ;
 Güell eo calz eur banne güin.
 Bo, bo tud dallet, *bis.*

Eo ar seurt-se, eo ar seurt-se ;
 Bo, bo, tud dallet,
 Güell eo güin eguet merc'het.

bis.

Ne c'houzanvàn qet a arc'hant
 Da louëda bars em godel ;
 An hostizien comunamant
 Anezàn tout a zo vell.

Bo, bo, tudou chin,
 Grit eveldòn, grit eveldòn ;

bis.

Bo, bo, tudou chin,
 Güell eo calz eur banne güin.

bis.

C'houi gant merc'het, c'houi gant arc'hant,
 A sonch beza dizoursi ;

Me, gant güin, a zo pauvr contant,
 Hac en ev betec al li.

Bo, bo, tudou chin,
 Grit eveldòn, grit eveldòn ;

bis.

Bo, bo, tudou chin,
 Ne zeus par d'eur banne güin.

bis.

Evit va renta-me laouen,
 Digassit din boutaillat ;
 Ne mon qet e chal gant moyen,
 Nemet em bezo güin mad.

Bo, bo, tudou chin,
 Grit eveldòn, grit eveldòn ;

bis.

Bo, bo, tudou chin,
Ne zeus par d'eur banne güin.

bis.

Va oll chagrinou a veuzàn,
P'em bez güin diouc'h va zec'het;
Gant netra nec'het ne vezàn
Eur vech ma vez din tommet.

Bo, bo, tudou chin,
Grit eveldòn, grit eveldòn;

bis.

Bo, bo, tudou chin,
Ne zeus par d'eur banne güin.

bis.

FIN.

